

### An amourouchen.

Pa voan em c'havel bihanic  
Me moa choazet eur veztrezik.

*mez vijen Kabab de merout*

mez pa zom savet bras on daou  
en tre zomp karantezaou.

an tad ar vam po deus klevet  
o dispartia o deus gred.

Kasset e voa va mestres ker  
Da chouarnerez da Treger (1)

Kasset e voa e vestrez koant  
Da c'houarnerez da Wemgamp.

— Pa kouste dime pemp kant skoet  
me iel da Wengamp de goelet.

Pa erruès en Gwengamp  
Voa e vestres en he c'hamp.

Debonjour dec'h va mestrezik  
Penos e za o c'halonik  
Va c'halonik na ra netra  
hag o hini penos a ra... (1)

— Va c'halonik a lavar din  
Karout an ini a plij din.

— tri voutou koad a meus uset  
ma mestrez a delampret

Kommancet ar pevare  
A c'hoas na ouzon o doare.

— Prenan c'hui raï galocher (2) ler  
evid ma chomet gate er gêr.

Mari Coad, 13 juillet 1851.

(1) *Ces strophes (de 2 vers) ont été ajoutées dans l'intervalle qui sépare la strophe précédente de la strophe suivante.*

(2) *Si la finale de mot est er, au lieu de ou (forme ordinaire), c'est qu'elle a été écrite sous l'influence du mot suivant ler.*